

Devezh-studi « Livioù »

Galv da bredeg

Deiziad an devezh : Sadorn 19 a viz Meurzh 2016

Lec'h : lise labour-douar Kerplouz LaSalle – an Alre

Eurioù : 9 e – 5 e 30

Aozadur :

Ar c'hevredigezhioù Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna

Get izili a skolioù-meur Breizh ar C'hornôg, Roazhon 2, Kreisteiz Breizh

Kinnig :

A bep sort **livioù** a zo e Breizh, hag e vehe kaoz a zouarouriezh pe a studiiñ labour-douar ar vro, hec'h ekonomiezh, he yezhoù ha c'hoazh. Setu neuze an tem dibabet ar blez-mañ d'an devezh-studi (ar pevarvet a-c'houde 2012) a vo aozet get Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna e-ser Sizhunvezh ar brezhoneg. Atav an hevelep pal d'an devezh : roiñ d'anaout labourioù kaset e brezhoneg hag àr ar brezhoneg, roiñ digarez d'an enklaskerion ha d'an dastumerion d'er gober e brezhoneg, ha tu da selaouerion a bep sort – brezhonegerion ha nann-vrezhonegerion – d'ober anaoudegezh get o labour en ur zonet d'o selaou.

Get un tem ken digor ne zleae ket bout gwall ziaes d'an danvez predegerion en em lakaat àr ar renk. Prest eo neuze ar c'homite skiantel da resev ha da studial kinnigoù kemer ar gaoz àr dachennoù èl :

- livioù ar vro (ar maeziadoù, an Arvor hag an Argoad, ar labour-douar, douaroniezh, douarouriezh, ar sevel tier, emdroadur an ekonomiezh, en em ziblas dre ar vro...);
- livioù e poblañs Breizh (diforc'hioù etre broioù Breizh, enbroidi a-bell e Breizh ha Breizhiz é tivroïñ, buhez e kêr ha buhez àr ar maez...);
- livioù é tenniñ d'ar sevenadur dre vras (diforc'hioù etre ar broioù, elfennoù dishañval ag ar sevenadur, Breizh teuzet pe lodek er sevenadur « hollvedel »...);
- livioù sosiologel (en em zaremprediñ bremañ ha gwezharall, cheñchamantoù a-fet soñjoù hag emzalc'hioù relijiel pe politikel, Breizh serret pe digor d'ar bed...)

Dedennet e vo èl-se ur publik ledan, c'hoant dezhoñ klevet kaozioù ha tabutoù a bep sort kaset e brezhoneg. Get ar soñj hag an c'hoant-se eo e vo prizet neuze ma kinnigo an danvez predegerion degas gouiziegezh d'ar brasañ niver.

Stumm ar predegennoù : pep predegenn a bado 30 min. + 10 min. evit ar c'hendiviz get an dud er sal.

Yezhoù :

Yezh pennañ an devezh studi e vo ar brezhoneg. Tu a zo kas ar c'hinnig predegenn en ur yezh dishañval (galleg, saozneg, kastilhaneg, katalaneg, alamanteg...) met ne vo degemeret ken nemet kinnigoù kaset get tud prest da zistag o fredegenn ha da respont d'ar goulennoù e brezhoneg.

Jubennet e vo razh ar predegennoù e galleg (hag e galleg hepken) àr-eeun ha skignet e vo ar gaoz-se dre dokarnioù. Setu e vo goulennet neuze get razh ar re degemeret, oc'hpenn evit derc'hel d'ar c'hinnig bet asantet get ar c'homite skiantel ha komz ag an danvez lakaet hag emglevet :

- komz ent naturel ha diwall a gomz re fonnapl ;
- komz kentoc'h evit lenn : klask enta en em harpañ àr notennoù kentoc'h evit lenn un destenn beurskrivet ;
- kas en a-raok d'ar jubennerion, dre dTi Douar Alre (oliertidouaralre@gmail.com), kement tra skrivet a c'hello sikour gete jubenniñ : testenn, kinnig luc'hvanoù (PowerPoint) mar bez unan, listennad skouerioù, listennad anvoù (tud pe aozadurioù), notennoù... emeur en soñj diskouez ha displeg d'ar selaouerion ;
- mar bez lennet un destenn e-ser ar predeg e vo pouezusoc'h c'hoazh d'ar jubennerion labourat àrni a-raok an devezh-studi ; oc'hpenn kement-se e vo goulennet get ar predegour lenn difonn ha chom a-sav dre bep div wezh ; mar bez roet sifroù, o distag splann hag o adlâret mar bez afer ; mar bez roet skouerioù, gerioù pe troiennoù dibaot a-walc'h da gavet er geriadurioù klasel, kempenn ur roll anezhe da roiñ get an droidigezh e galleg d'ar jubennerion ;
- pa vo kemeret ar gaoz, savet ur goulenn e-pad an diviz, gortoz un tammig kent respont : amzer d'ar jubennerion achuiñ troiñ ar goulenn.

Kinnigoù predegennoù (300 ger d'ar muiañ ha levrinnadurezh verr) a zo da vout kaset **a-raok ar 01/02/2016** da dTi Douar Alre, dre ar post (11 ru an Tanin, 56330 Pleuwigner) pe dre bostel (oliertidouaralre@gmail.com).

Diviz ar c'huzul skiantel àr ar sujedoù kinniget a vo kemennet d'an holl re o do kaset doare an danvez predeg d'an 19/02/2016, ur miz rik kent an devezh-studi, amzer d'ar bredegerion da brientiñ o c'haoz.

Razh an danvez a c'hello sikour get ar jubennerion a vo da gas da oliertidouaralre@gmail.com a-benn an **12/03/2016 d'an tardetañ** (ar pezh a vo kaset èl-se ne vo ket skignet ; ne servijo ken nemet evit aesaat aoziiñ ar jubenniñ).

Komite aoziiñ :

- Joël Le Baron, bez-prezidant Ti Douar Alre, e penn komision ar brezhoneg
- David ar Rouz, ezel a guzul-meriñ Kerlenn Sten Kidna
- Olivier Berson, animatour brezhoneg Ti Douar Alre

Komite skiantel :

Daniel Carré, doktor àr ar brezhoneg, prezidant Ti Douar Alre
Daniel an Doujet, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Roazhon 2)
Erwan ar Pipeg, doktor àr ar brezhoneg, CRBC (Skol-veur Breizh ar C'hornôg)
David ar Rouz, doktor àr skiant an troiñ, LIDILE (Skol-veur Roazhon 2) ha PREFics (Skol-veur Kreisteiz Breizh)

Kalañder :

01/02/2016 : termen da gas ar c'hennigoù
19/02/2016 : dibabet ar predegennoù get ar c'huzul skiantel
12/03/2016 : termen da gas ar skridoù ha razh an elfennoù a c'hello sikour get ar jubennerion
19/03/2016 : devezh-studi